

Sellit ouzh Lann Vraz

Seizh vloaz-pad en deus Meriadeg Vallerie barnet filmoù bep sizhun evit Bremaik. Sed e soñj diwar-benn ar film hir brezhonek kentañ, Lann Vraz.



© Kalanna

Gwenn (Aziliz Bourgès), distro d'he bro goude pemp bloaz e penn all ar bed.



Mark (Erwan Kloareg), dousig kozh Gwenn, boulc'het ur vuhez nevez gantañ.

an istor : pemp bloaz eo chomet Gwenn (Aziliz Bourgès) hep reiñ tamm keloù ebet d'he familh. Ha setu hi distro d'he bro c'henidik diwar atiz he breur Fañchig (Klet Beyer) evit lidañ 60^{vet} deiz-ha-bloaz o mamm Corentine (Nikol ar Vourc'h). A-boan diskennet eus ar c'harr-nij en em gav paket Gwenn e-kreiz ar jeu zo savet etre he eontr Veig (Bob Simon) ha Mark (Erwan Kloareg), bet he dousig. An eil zo e penn embregerezh sevel istr ar familh ha graet eo e soñj e ranker astenn an dachenn ha gounit istr "triploid" evit ma n'ez afe ket ar stal da netra. Egile en deus kemeret penn difennerien al laboused a stourm ouzh ar raktres drastus-se...

UR MAEN-BONN

Emichañs ho peus klevet e oa bet savet ar film faltazi hir kentañ e brezhoneg, ma n'ho peus ket ez eus stad ennon o kemenn deoc'h an darvoud-se. Rak, mod pe vod, e chomo an dra-se evel ur bazenn istorel evit kleweled ar vro. Gwir eo e kaver er metoù-se tud youlek hag a zo deuet a-benn da gas ar *schmilblick* war-raok abaoe tremen un dek vloaz bennak : krouidigezh Dizale, ar film faltazi advouezhiet kentañ, krouidigezh Brezhoweb, ar sitkom kentañ, krouidigezh BreizhVOD, ar film erotek advouezhiet kentañ (ma n'ho peus ket e welet ez eus stad ennon o kemenn deoc'h ez eus tu d'e bellgargañ diwar BreizhVOD atav [s.o. *Bremañ* niv. 381-382]).

PRENAÑ AR SKIANT

Tamm-ha-tamm eo bet fonnusaet evel-se korfoù-micher ar filmañ, ar seveniñ, ar c'hoari, h.a. Ken bras ha ken bihan m'eo deuet da vezañ posupl krediñ sevel ar film faltazi hir kentañ en hor yezh. Da-geñver ur staj skrivañ oberennoù faltazi, ennañ tud a vicher e bedig ar c'hleweled e brezhoneg, e oa bet roet lañs d'ar raktres e 2010 [s.o. *Bremañ* niv. 341]. Met ul labour ramzel a chome d'ober goude evit kempenn ar raktres, dastum an arc'hant a zo ezhom, bodañ ar skipailh, treiñ, h.a. evel ma ranker ober evit kement film zo.

Ar film Lann Vraz

Breizh – 2012. Seveniñ gant Soazig Daniellou. Senario gant Aziliz Bourgès, Soazig Daniellou (ha gant sikour re all c'hoazh). Kenbroduet gant Kalanna, France Télévisions, Tébéo, TVR & Ty Télé.

En nevezamzer e oa bet skignet ar film gant ar chadennoù skinwel o doa e genbroduet. Diskouezet eo bet evit digeriñ Gouel ar Filmoù e Douarnenez ivez. Da-geñver un droiad e salioù sinema zo e vo skignet adarre en diskar-amzer, adalek penn kentañ miz Here betek kreiz miz Du. An DVD a zeuio er-maez d'ar memes koulz.

Evit gouzout hiroc'h : WWW.KALANNA.COM

UL LABOUR A-FESON

Ha neuze petra a dalvez **Lann Vraz** evitañ e-unan ? A bep seurt a glever, ret eo mont d'e welet evit ober e soñj e-unan ha ne vo ket amzer gollet. N'haller ket lavaret ez eo disi an oberenn met splann eo ez eus bet graet ul labour a-feson gant pep hini.

Plac'h an teulfilmoù eo Soazig Daniellou, alese e oar mat penaos lakaat Breizh war wel ha reiñ d'an arvestourien peadra d'ober anaoudegezh gant pep tudenn en un doare subtil. Un dra zo souezhus memes tra, krediñ a reer muic'h er sach-blev etre ar saverien istr ha difennerien al laboused eget en istor karantez etre an div dudenn bennañ : un nebeud arvestoù etrezo o-daou a vank marteze evit krediñ da vat en o zrivliadoù.

Komedianed arroutet war o micher eo a ro korf d'an istor. Dont a reont eus metoù disheñvel evel-just, lod a anavezet kentoc'h dre ar c'hoariva, re all dre an advouezhiañ hag ar sitkomoù, met ouzhpenn dereat eo live o c'hoari, dre-vras. Klet Beyer, da skouer, a ziskouez pebez aktor barrek eo, adarre.

Entanus eo gwelet e teu ar Vretoned a-benn anezhi pa vez roet dezho frankiz da ober. Petra a c'heller goulenn bremañ ? Unan all !